



Diskan :

**Sant Konogan, mignon Doue,
Grit ma karimp traoù an ene ;
Grit ma kerzhimp en ho roudoù,
Evit mont ganeoc'h d'an Neñvoù.**

Refrain :

**Saint Conogan, ami de Dieu,
Faites que nous aimions les choses de l'âme ;
Faites que nous marchions sur vos traces,
Pour aller avec vous au Ciel.**

1 – Ganet eveldomp-ni e Breizh,
C'hwi 'poa madoù, madoù e-leizh ;
Met, petra 'dalv traoù an douar,
E-tal gras Doue hag e c'hloar ?

*Né comme nous en Bretagne,
Vous aviez des biens, de grands biens ;
Mais que valent les choses de la terre,
Par rapport à la grâce de Dieu et à sa gloire ?*

2 - C'hwi 'hentas ar skolajoù bras
Hag ho poa deskadurezh vras ;
Met holl skiantoù ar bed-mañ,
E-tal ar furnez, n'int netra.

*Vous avez suivi les grandes écoles
Et vous aviez un grand savoir ;
Mais toutes les sciences de ce monde,
Comparées à la sagesse, ne sont rien.*

3 – C'hwi 'droas kein d'an enorioù,
D'ar blijadur ha d'ar madoù,
Evit gounit ar Baradoz
Gant buhez santel da c'hortoz.

*Vous vous êtes détourné des honneurs,
Des plaisirs et des biens,
Pour gagner le Paradis
Par une vie sainte en attendant.*

4 – Galvet da vout eskob Kerne
C'hwi 'eas 'eneb d'ho polontez,
Evit bout sentus ouzh mouezhioù,
Mouezhioù Doue hag ho mestroù.

*Appelé à être évêque de Cornouaille,
Vous le fûtes à contrecœur,
Pour être obéissant aux voix,
Les voix de Dieu et de vos supérieurs.*

5 – Ur wech e karg, ur wech sakret,
C'hwi 'grogas lemm, korf ha spered ;
C'hwi 'beurzalc'has betek mervel
D'ober mat ho labour santel.

*Une fois dans votre charge, une fois ordonné,
Vous vous y êtes vite mis, corps et âme ;
Vous avez continué jusqu'à la mort
De bien accomplir votre sainte tâche.*

6 – Skoet d'ar maro gant terzhienn,
D'ar bedenn ha d'ar binijenn,
C'hwi 'chomas bepred aketus
'Vel war ar Groaz ho mestr Jezuz.

*Frappé à mort par la fièvre,
À la prière et à la pénitence
Vous êtes resté assidu
Comme sur la Croix votre maître Jésus.*

7 – Pellait diouzhimp ar grenijenn,
Maget er c'horf gant an derzhienn,
Ma vimp evel pesked en dour,
Seder, yac'h d'ober hon labour.

*Éloignez de nous le tremblement,
Provoqué dans les corps par la fièvre,
Que nous soyons comme des poissons dans l'eau,
Joyeux, en bonne santé pour faire notre travail.*

8 – Magit dreistholl en hor c'halon
Gwe'enn vat ar feiz gant gwrizioù don,
Temzet-hi druz gant dour ar c'hras,
Ma teulo frouezh, ha mat ha bras. (Amen...)

*Nourrissez surtout dans nos cœurs
Le bon arbre de la foi avec des racines profondes,
Nourrissez-la abondamment de l'eau de la grâce,
Qu'elle donne un bon et grand fruit. (Amen)*